

NOËL

TON ANAVEZET

Pa oué gannet Jezuz, hor Zalver,
Mari, he Vamm, her mailluraz,
E Bethleem, en eur c'hraou dister,
Var ar plouz hi hen astenaz.

Gloria in excelsis Deo. (bis)

Rak sant Joseph enn hostaleri
N'en doa ket kavet a zigor.
Red voué d'ezhan koulz ha da Vari,
Enn eul leac'h paour klask ar goudor.

E kichenik, ez oa pastored,
Hag hi dihun ha c'hoaz var zao,
Dre ma'z edont var dro ho denved,
Ouz ho diouall, e gis ar vro.

Setu eun Eal, déuet a berz Doue,
O chom a za en ho c'hichen.
Ha spountet holl e oué an dud-se
Dre eun tarz bras a sklerijenn.

N'o pezet aoun, eme 'nn Eal santel
Guir ebed n'oc'h euz da greña,
Me zigas d'oc'h ha d'ann dud fidel,
Eur c'helou mad a leun a joa.

E ker David eo ganet hirio
Salver ar bed, guir va Doue ;
Selaouit mad ha me lavaro
Penaoz anaout ho roue.

Kaout a reot eur mabik bihan,
Hag hen mailluret enn eur c'hraou.
It, pastored ha kerzit buhan,
It, hag adorit hon Aoutrou.

Ann Eal, a veac'h en doa prezeget,
Ma teuz evel arme ann Ee,
Elez. Elez, er vann voue klevet
O kana da veuli Doue :

Tud ann draonienn, tud ar menezlou,
Kanomp enn huel hag er prat :
Gloar da Zoue e barr an Envou,
Var ann douar peoc'h d'an dud vad !

MAGNIFICAT

MAGNIFICAT anima mea Dominum.
Et exultavit spiritus meus in Deo
salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ
sue ; ecce enim ex hoc beatam medi-
cent omnes generationes.

Quia fecit magna qui potens est, et
sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in
progenies timentibus eum.

REFRAIN FRANÇAIS

Les chœurs angéliques
Ont chanté : Noël !
Mêlons nos cantiques
Aux accents du ciel
Noël, Noël, chantons tous Noël ! (bis)

Fecit potentiam in brachio suo, dis-
persit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede ; et exal-
tavit humiles.

Esurientes implevit bonis, et divites
dimisit inanes.

Suscepit Israël puerum suum, recor-
datus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros,
Abraham et semini ejus in sæcula.

DISKAN BREZOUNEK

Elez ar Baradoz a ganaz : Noël !
Kanomp oll da Jezuz : Bennoz eternal
Noël, Noël, kanomp oll Noël ! (bis)

IMPRIMATUR : Quimper, le 18 Décembre 1907.

P. CORRIGOU, Vic. Gén.

Kanaouennou Nedeleek



Chants Bretons et Français pour Noël

A MINUIT

Minuit. Chrétiens, c'est l'heure solennelle
Où l'Homme Dieu descendit jusqu'à nous
Pour effacer la tâche originelle
Et de son Père arrêter le courroux,
Le monde entier tressaille d'espérance
A cette nuit qui lui donne un Sauveur.
Peuple à genoux, attends ta délivrance,
Noël ! Noël ! Voici le Rédempteur ! (bis)

A la Grand' Messe de Minuit

Lauda Sion Salvatorem
Lauda ducem et pastorem
In hymnis et canticis

(Loue, peuple fidèle, ton Sauveur,
Loue ton chef et ton pasteur par des
hymnes et des cantiques.)

Aux deux Messes basses

N° I LE MONDE AUTOUR DU BERCEAU DE JÉSUS

REFRAIN

Il est né le divin enfant !
Plein d'allégresse chacun s'empresse
Au berceau du divin enfant,
Pour fêter son avènement.

I. — L'INFIDÈLE

Comme aux Mages, le Ciel en feu
Te révèle au pauvre infidèle !
Je t'adore et je fais le vœu
De te prendre pour le vrai Dieu.

II. — LE CHRÉTIEN

Divin Fils de Marie
O notre Rédempteur
Qui rouvre la Patrie
Au genre humain pécheur,
Enchaîne les Enfers,
Fais luire l'espérance,
Délivre l'Univers — des fers
Et rends-nous à jamais — la paix,
La paix dans l'innocence.

III. — LES ANGES

O Jésus, tes Anges
A ces chants joyeux
Mêlent les louanges
Et les chants des cieux } (bis)
Noël, Noël, Noël, Noël.

IV. — LA TERRE ET LE CIEL

(2 voix se faisant écho)
Noël, Noël, — c'est l'Eternel
Qui vient sauver — l'homme mortel.
Gloire à Jésus — Emmanuel
Roi de la terre — et Dieu du ciel.

Saint-Pol-de-Léon, Imprimerie F. MANAC'H, 15, Grande Place.

Var ar Menez

TON : *O Vierge Fontaine Rocher* (Kantik Lourd)

Var ar menez ar Bastored
En eur zivoal ho denvedigou
Souden en noz sklerijennet,
A glevaz euz a var an Nenvou :

DISKAN :

Noël, Noël, Noël da Jezus. (bis)

Aberz Doue eur burzud braz
Var an douar a zo c'hoarvezet ;
Hag en Elez a respontaz :
Eur Zalver evidoc'h zo ganet.

Hag ar Bastored etrezho
An eil d'egile a lavare :
Kerzomp, brema ni a welo
Hor Zalver, hor Mestr, hag hor Roue.

Selaouit holl eme an El,
It da Bethleem, da gear David ;
Eno e kafot eur bugel
D'ezan a greiz kalon lavarit :

En eur c'hraou digor d'an amzer,
Ha var eun tàmik plouz astennet
Eno e weljont ar Zalver,
Ar bugelik nevez mailluret.

Evel ar Bastored, sentus
D'an Elez o deuz ho c'helennet ;
Ni oc'h ador, Mabik Jezus,
Epad an nosvez-ma benniget.

Evel gwech all bolz an Nenvou
An Ilis a zo sklerijennet :
Kinigomp oll hor c'halonou
D'hor Mabik Jezus muia karet.

Mabik Jezus hor gwir Zalver
Brema var an douar diskennet
Er Sakramant euz an Aoter
Ra viot da viken adoret.

Mabik Jezus, o diskennit
Dre nerz ho Sakramant adoret
Diskennit ennomp, ha mirit
Na vezimp taged gant ar pec'hed.

Pa deui evidomp ar maro
Hon digemerit gant karantez
Ha da virviken ni gano
En ho Paradoz gant an Elez.



N° 3

IN CORDIS JUBILO

(VAR AN TON : *Vàrice p'èces* euz Sollemnes.)

- 1 E Bethleem ez eo ganet, alleluia.
Jezus hor Zalver benniget, alleluia, alleluia.

DISKAN LATIN

In cordis Jubilo
Christum natum adorémus
Cum novo cantico.

- 2 Gwir vab Doue en em c'hreat den,
A zo kousket etre daou loen.
3 Souezi rafec'h a dra zur,
O velet Doue krouadur.
4 He-unan e c'houarn ar bed,
Ha gant e vam e vez douget.
5 Dont a ra 'n Elez euz an Ne,
Da velet er c'hraou mab Doue.
6 Oll en eur c'hantik dudiuz,
E veulant a unan Jezus.
7 Gervel a reont ar Bastored,
Da welet ho Salver ganet.
8 Deuz Saba e teu tri Roue,
Da stoui dirag ho Doue.

DISKAN BREZOUNEK

Gant laouenedigez
Meulomp oll Jezus hor Salver
Gant eur c'hantik nevez.

- 9 Da Jezus evidomp ken paour,
E roont ezanz, myrrh hag aour.
10 Evid diskuez dre gement-se,
Eo gwir Doue, den-ha Roue.
11 Mab Doue zo e gwirionez,
Mab da Vari atao gwerc'hez.
12 Vit hor prena ni pec'herien
Eo e-unan en em c'hreat den.
13 Oll eta er gouelioù kaer-ma,
Meulomp Doue heb chana.
14 Gloar da dri Ferson an Drinded,
Bêteg ha goude fin ar bed.

N° 4

Noël, Noël, à l'Éternel !

1
Noël, Noël, c'est le Sauveur,
L'espoir du genre humain pécheur
C'est le Très-Haut, le Tout-Puissant
Qui naît pour nous petit enfant
Chantons Noël ! Emmanuel !

REFRAIN

Noël, Noël à l'Éternel !
Noël, Noël, chantons Noël !
Noël, Noël à l'Éternel
Gloire au Sauveur venu du Ciel !

2
Oui c'est le Verbe, l'Éternel,
Le Roi du monde et Dieu du Ciel
C'est lui, c'est la Divinité
Qui vient s'unir l'humanité
Chantons Noël ! Emmanuel !

3
Il vient pour prendre notre sort
Et nous délivrer de la mort
Il vient touché de nos douleurs
Calmer nos maux, sécher nos pleurs !
Chantons Noël ! Emmanuel !

4
Lever enfin le juste arrêt
Qui sans retour nous condamnait
Rendre au bonheur nos cœurs flétris
Et nous rouvrir le paradis
Chantons Noël ! Emmanuel !

5
Fut-il jamais un plus beau jour
Plus digne de nos chants d'amour ?
Non rien n'égale le tableau
Que nous présente ce berceau !
Chantons Noël ! Emmanuel !

6
Un roi né dans la pauvreté
Un Dieu vêtu d'humilité
Mais s'il nous cache sa beauté
Il nous révèle sa bonté
Chantons Noël ! Emmanuel !

7
De l'humble étable au sein des Cieux
Sachons chrétiens porter nos yeux
Et célébrons dans nos concerts
Le Rédempteur de l'Univers
Chantons Noël ! Emmanuel !